

# DIWAN


BREIZH - BRETAGNE



S K O L I O Ù

DIVYEZHEK HA LIESYEZHEK


## PETRA EO DIWAN E 1989 ?



Diwan, evit ar bloavezh-skol 1988-1989, e pemp departamant Breizh a zo anezhañ 20 diazezadur, enno 19 skol-vamm, 14 Skol-gentañ, hag ur skolaj eil derez.

## 12 VLOAVEZH O VONT WAR-RAOK

Abaoe m'eo bet digoret ar gentañ skol-vamm, er bloaz 1977, n'en deus ket DIWAN dihanet da zigeriñ skolioù nevez ha da greskiñ niver e skolidi, e gelennerien, hag e goskor-sterniañ. E 1980 e voe digoret ar gentañ skol evit an derez kentañ, hag e 1988 ar skolaj teiryezhek e Brest. Kendael Etrevroadel Landerne e 1985, goude-se e 1988 berzh bras EUROSKOL e Brest, ma kemeras perzh enni 600 bugel a 15 rannvro eus EUROPA e-lec'h ma vez graet gant ur deskadurezh divyezhek, hag a voe gweladennet gant hogozik 30.000 den, ha pelloc'h sinadur un emglev gant an Deskadurezh Vroadel, Rannvro Vreizh hag an Departamantoù, kement-se a zo bet pazennou meur diorroadur DIWAN.



## TALVOUDEGEZH AR BREZHONEG

E Breizh, komz brezhoneg kenkoulz ha galleg a zo kement ha gouzout an doare da vezañ pep tra, anvioù al lec'hioù, anvioù an dud, ar boazioù hag an emzalc'hioù, bezañ gouest da doullañ kaoz gant pep kendivizer, bezañ lemm ha poellek e spred o vestroniañ ar geriou hag o ster, evel gant pep divyezhegezh kempouezet, kaout an tu da zigeriñ aesoc'h o harzoù d'ar yezhoù europat hag etrevroadel all, kavout mammenn ul lorc'h reizh, an hini a denner eus ur bersonelezh sammet evit gwir, ha gant-se un nerzh brasoc'h. Un tu ouzhpenn d'ober berzh en Europa hag er bed da zont eo komz ken brezhoneg ken galleg.



## UN DIVYEZHEGEZH GWRIZIENN

Anavezet-kaer eo bremañ spletoù an deskadurezh divyezhek. Lakaat ur Breizhad yaouank en ur skol DIWAN a zo dibab un divyezhegezh gwriziennet en e amva naturel, ma'z eo brezhonek al lec'hioù, an emzalc'hioù, ha dreist-holl meur a unan eus e dud nes. An divyezhegezh-se eo aesoc'h ober ganti, ha dihunusoc'h kalz eo ives, rak ar bugel en em gav klok gant e orinoù, en e vleud, evel-se. Hag ar splet pennañ eo e vo aesoc'h dezhañ eget d'ar re all deskiniñ un drede pe ur bevare yezh etrevroadel.



## ALC'HOUZEZ AR BERZH; AN DIVYEZHEGEZH ABRED DRE AR "SOUBIDIGEZH"

Abaoc daouzek vloaz en deus DIWAN degaset e skiant-prenet da hentenn ar "soubidigezh abred", anavezet-kaer dija, ha bet diorroet dreist-holl abaoe 25 bloaz e Bro-Ganada gant kant ha kant mil Kanadian yaouank, saozneg o yezh, deuet da zivyezhegerien saozneg-galleg. Ar bugel a zesk brezhoneg, pe a wella e yezh, buan-ha-buan en un doare natur er skol-vamm, hag e zeskamant war al lenn hag ar skrivañ a dalvez, didorr, d'ar galleg a vez degaset bep un tammig er skol-gentañ. An div yezh a vez kelennet evito o-unan, ha ganto e vez graet da gelenn danvezioù all ar rolloù-skol kefridiel. Bevañ seder a ra skolidi DIWAN elev-se, gant un divyezhegezh kempouezet, ma vez an eil yezh hag eben keit-ha-keit. Tomm-kenañ int ouzh o skolioù forzh penaos ha diskouez a reont talvoudegezh ar reizhad-se gant o berzh-mat enno.



## KELENNOURIEZH DIWAN

Ouzhpenn diazezenn ar soubidigezh abred, e ra skolioù DIWAN diouzh an hentenoù-kelenn bet arnedet eus ar gwellañ. Ar skol-vamm a zo ul lec'h-darempred klet-mat hag a vroud o frimed natur dreist d'ar vugale betek en o 6 vloaz. Distank eo an niver anezho. Skoliad DIWAN a vez fiziet e labour ennañ hag a vez digoret e spered war an diavaez. Unan eus pennvennadoù kelenouriezh DIWAN eo tapout diazezoù start-mat war al lenn hag ar skrivañ, ken e brezhoneg ken e galleg. Gant berzh e vez degaset binvioù klev-gwel ha stlennata bet diorroet gant kelennerien DIWAN.



## KELENNERIEN STUMMET HA MENNET

Da ZIWAN eo a bouez bras barregezh ha mennadoù e gelennerien. Ouzhpenn-se e vezont stummet gant DIWAN hag iveau gant an Deskadurezh Vroadel, hervez an emglevioù bet skoulmet. Eskemet e vez dibaouez titouroù ha discoc'hou etre kelennerien DIWAN ha gant skolioù heñvel e brioù all eus Europa.



## DIGOUST HA DIGOR D'AN HOLL

Dizalc'h-kenn eo DIWAN hag e skolioù a zo digor d'an holl vugale, eus tiegezhioù brezhonek pe zivrezhonek, petore bennak e ve o menoziouù pe o c'hredennou, hag eveljust, o danvez, pa'z eo an digoustet un diazezenn all eus deskadurezh DIWAN.



## AR C'HENTAÑ SKOLAJ DIWAN LIESYEZHEK

Digoradur ar Skolaj "Roparz Hemon" e Brest, e miz Here 1988, a zo bet ur bazenn reizh hag iveau diazez en emdroadur DIWAN. Pell ha pizh eo bet ragaozet an digoradur-se gant hanter-kant kelenner ha yezhour o deus lakaet ar rolloù-skol da glotañ gant ur gelennadurezh teiryezhek, rak ouzhpenn ar brezhoneg hag ar galleg, ar saozneg da gentañ (ha da c'houde yezhòù all) a zeu iveau tammoù-tamm, dre hentenn ar soubidigezh, da vezañ ur yezh-kelenn. Er skolaj ez a mat-tre an traoù en o zro a-vremañ, ha niver e skolidi a gresko buan er bloavezhiou a zeu. Pelloc'h e vo ret digerin skolajoù all e lec'hioù all e Breizh, anat eo.

## DIWAN A ZO ANEZHAÑ IVEZ...



..."AN HERE", un ti a embann levrioù ha bannoù treset e brezhoneg, ar c'hazetennoù CHOLORI ha TALABAO, hag a zo o prientiñ ar c'henfañ geriadur bras hollvrezhonek a dalvez dreist-holl da skolajidi DIWAN.



..."AN OALED", kreizenn sevenadur ha dudi e Treglonou, hag a ro tu, a-hed ar bloaz, da vont war ar yezh hag ar sevenadur brezhonek, a-diegezhioù pe a-strolladoù, en ur varc'hegezh, en ur vaseal, diouzh ma vez tro, h.a.



..."STUMDI", aozadur evit ar stummadur dibaouez hag a ginnig e Breizh a-bezh, d'ar vichereien ha d'ar sternidi, stajou yezh ha sevenadur brezhonek, istor, armerzhouriez ha merouriez, video, doareoù ar c'hoarierezh, h.a.

## BRUD HA LEVEZON DIWAN


Pelloc'h eo dibaot ar Vrezhoned, e Breizh da vihanañ, n'o deus ket klevet any eus DIWAN evit-c'hoazh, e stumm pe stumm. Kelaouennou, skingomzou ha skinwel ar vro a ro alies-kaer doareoù eus buhez ar "Skolioù Diwan". A-vremañ e vez graet ouzh DIWAN gant ar stlenn evel ouzh ar reizhiadou-desevel all. Met e zibarelez hag e heñvelekatdou ouzh ar pep heverkañ e sevenadur ar vro a laka neozh DIWAN da dremen da ensavadur-skouer evit dazont ar bersonelezh vreizhek. Ha gwir eo, evit ar wech kentañ, kudenn ar brezhoneg a vez pleustret warni en un doare fetis ha, war un dro, tre diouzh erverkadoù an amzer-vremañ. Daelidi Vreizh hag an dilennidi lech'el all, a bep tu, kenkoulz ha Kuzul Rannvro Vreizh hag ar Chuzulioù-Departamant, o deus komprenet kement-se ervaat, hag o deus diskouzezet o skoazell unvan meur a wech.

## ARC'HANTADUR DIWAN

Tro 10.000.000 a lurioù eo budjet hollek DIWAN evit 1989. Kouest keitat ar skoliadur evit pep bugel a zo da lakaat e kemm gant hini an Deskadurezh Foran. Arc'hantadur e vez ar budjet evit un drederenn gant ar Stad, evit un eil trederenn gant Rannvro Vreizh ha pemp departament Breizh, hag evit an dredrenn all e ranker ober gant an emarc'hantadur hag an degasadennoù a-c'hrad-vat hag a-hiniennou, dreist-holl e-doare an treuzdougadurioù war-eenun miziek.

## AN DIVYEZHEGEZH EN EUROPA

Ar braz eus poblañs ar bed a zo divyezhek, ha teiryezhek zoken. Dek ha dek milion a Europiz a gomz war un dro yezh o Stad hag o yezh-int, hag iveauz aliezik ur yezh etrevroadel, hag a denn anat o mad eus al liesyezhegezh-se. Evel ar c'hembraeg, ar c'hataloneg, ar frizeg, h.a., n'eo ket ar brezhoneg ur glad sevenadurel prizius hepken eta, met ouzhpenn ur c'hevala da lakaat da dalvezout dre an deskadurezh divyezhek abred hag a zo an tu nemetañ, estrevit an hêrezh a-berzh an dud, da lakaat rummadou divyezhek da zont an eil war-lerc'h egile.



## TRA AN HOLL VREZHONED EO DIWAN

Penaos e c'heller bezañ brezhon ? setu ar gouleñn lakaet da anv da unan eus e levrioù gant ar skrivagner Morvan LEBESQUE. Meurik a respont a zo d'ar gouleñn-se, met an hini a zeu an aliesañ er spred - ha dreist-holl, un arouez eo, e spred-ar re n'int ket Breizhiz pe genidik eus Breizh - eo "Dre zifenn ar brezhoneg"... Hogen, e-touez lies intrudu all, meulus ha kaer-kenañ peurviañ, ez eo DIWAN, hep mar, an hini a c'hell mont ar pellañ war an tu-se, en ur harpañ a-zevri-bev diorroadur armerzhel ha kevredigezhel Breizh. Evit gwir, gant astenn reizhiad-deskadurezh DIWAN e vo stummet ur rummad liesyezhek, digor ha birvidik, lorc'h ennañ gant e sevenadur, ha goust da dalañ ouzh ar bed da vont. Dleout a ra eta pep Brezhon da gentañ-penn, skorai DIWAN, o kelaoua diwar-benn e obererezhiou, o kelaouiñ a-zivout e sevenadennou, ouzh e skoazellañ gant arch'ant dreist-holl. A drugarez da viliadoù a dud o deus graet treuzdougadurioù war-eenun miziek da ZIWAN, abaoe daouzek vloaz, eo ez eus bet tu d'en em gavout er stad vat a-vremañ. Ar miliadoù-se avat a rank dont da vezañ dek ha dek miliad. Ret-holl eo, evit gwir, e kreskfe DIWAN evit ma veft kaset an taol da benn-mat, ha daoust da drec'hioù 1988 ha d'an anaoudegezh kefridiel, ne vez ket kendalc'het evit-c'hoazh da arc'hantaouïñ DIWAN, evel ur gwir wazerezh foran evit an deskadurezh, gant ar strolllezh kement hag e broioù all eus Europa e degouezhiou heñvel. A-benn gallout derc'hel da vont war-raok atav, o c'hortoz ur c'henglotadur europat a vefe deuet mat, hag a c'hellef bezañ moarvat, e rank DIWAN fizioùt e poblañs Vreizh, pe er Vrezhoned er-maez eus Breizh.

## SKODENNOÙ DA ZIWAN HA TAILHOÙ

**Previzidi :** ar skodennoù da ZIWAN, evel da aozadurioù all mat d'an holl, dreist-holl ar re a denn d'an deskadurezh, a c'hell bezañ diskontet diouzh ho korvoderioù diskleriet hag a dalvez eta da arboellañ tailhou. An diskont-se a c'hell bezañ graet betek un hollad profoù nad a ket en tu-hont da 1,25 % diouzh ho korvoder dindan dailhou. An arboell tailhou a zo diouzh live ho korvoder, eleze diouzh ar feur-tailhañ a glot ouzh al lodennou dreist eus ar c'horvoder-se. Evelkent ez eus ur reolennadur a-ziforc'h evit ar c'henfañ savad profoù bloaziek ingal a 1.200 l., a gas un arboell tailhou eus 56,8 %, pe 681,60 l. pep bloaz, n'eus forzh pegement eo ho korvoder.

**Embregerezhioù :** ar skodennoù da ZIWAN a c'hell bezañ diskontet diouzh ar buzad dindan dailhou, anezhañ 2 % eus o c'hengread d'ar muiñ.

## DOAREOÙ ALL DA SKOAZELLAÑ

Eveljust e pouez DIWAN dreist pep tra war an treuzdougadurioù war-eenun miziek a zo bet bete vremañ, hag a chomo pell c'hoazh, alc'houez e ziorroadur, dre ma'z int talvoudek en holl ha dre ma vezont graet ingal. Met ar Vrezhoned hag ar c'hraideon o deus komprenet ervaat pegem pouezus eo ar gefridi, ha mar gallont, a blicoñ dezhio moarvat kenoberiañ a-hend-all evit dazont an embregadenn. Gouzout a ranker ez eo a bouez bras dija e taolfe pep hini da skignañ ar muiñ ar gwellañ keleier eus reizhiad-deskadurezh ha sevenadennou DIWAN. Evit gwir, gant kalz tud bet kelaouet fall, e vez sellat ouzh kudenn ar brezhoneg en un doare amgridik, diouzh gwechall gozh nemetken, hag hep nep anaoudegezh eus degouezhiou heñvel en Europa.


Harpañ a reoc'h koulz all DIWAN gant reñ da anavezout anvioù ha chomlec'hioù tud, aozadurioù pe embregerezhioù, a vefe dedennet hag a c'hellef reñ skoaz ived.

Ouzhpenn-se ez eus strolladoù-skoazell, savet da gevredigezhioù lec'hel hervez lezenn 1901, hag a zo talvoudus-bras o labour kenkoulz e Breizh hag e pep lec'h all ma'z eus Brezhoned diroet. Ar strolladoù-se a vez aozet ganto gouelioù, prezegennou, hag a skoulm lies darempred da greskiñ e vrud hag e zanvez da ZIWAN. Evit gouzout hiroc'h, skrивit pe bellgomzit a-benn-kaer da Dreglonou da atebeien DIWAN.

DIWAN  
Treglonou B.P. 22  
29214 LANNILIS  
Pg. 98 04 05 42


# DIWAN

BREIZH - BRETAGNE



ENSEIGNEMENT  
BILINGUE ET PLURILINGUE


## QUE REPRESENTE DIWAN EN 1989 ?



Pour l'année scolaire 1988-1989, dans les cinq départements bretons, Diwan totalise 20 établissements, qui comprennent 19 écoles maternelles, 14 écoles primaires et un collège secondaire.

## 12 ANS DE PROGRES CONSTANTS

Depuis l'ouverture de la première maternelle en 1977, DIWAN ("germe" en breton) n'a pas cessé d'ouvrir de nouvelles écoles et d'accroître ses effectifs d'élèves, d'enseignants, et de personnel d'encadrement. En 1980 était ouverte la première école primaire, et en 1988 le collège trilingue de Brest. Le Colloque International de Landerneau en 1985, puis en 1988 le grand succès d'EUROSKOL à Brest, avec la participation de 600 enfants de 15 régions différentes d'Europe où se pratique une éducation bilingue, et près de 30.000 visiteurs, et enfin, la signature d'un protocole avec l'Education Nationale, la région Bretagne et les départements, ont été des étapes décisives du développement de DIWAN.



## UTILITE DE LA LANGUE BRETONNE

En Bretagne, parler aussi bien le breton que le français, c'est posséder le code qui permet de tout comprendre, noms des lieux, des gens, habitudes et comportements, c'est avoir la clef de contact avec tout interlocuteur, c'est comme pour tout bilinguisme équilibré, posséder l'agilité d'esprit et la sagesse que confère la maîtrise des mots et de leur sens, c'est le passeport qui ouvre plus facilement les frontières des autres langues européennes et internationales, c'est la source d'une fierté légitime, celle que l'on tire d'une identité originale réellement assumée, et donc le moteur d'un dynamisme accru. Etre bilingue français-breton, c'est dans l'Europe et le monde de demain, un nouveau facteur de réussite.



## UN BILINGUISME ENRACINE

Les avantages de l'éducation bilingue sont maintenant bien connus. Le choix d'une école DIWAN pour un jeune breton, est celui d'un bilinguisme enraciné dans son environnement naturel, là où les lieux, les comportements, et surtout bien des personnes dans son entourage parlent breton. Ce bilinguisme est plus facile à pratiquer et plus éprouvant, car l'enfant se trouve ainsi bien accordé à ses origines, "bien dans sa peau". Et avantage capital, l'acquisition d'une troisième ou d'une quatrième langue d'usage international lui sera plus facile qu'aux autres.




## **LA CLEF DU SUCCES; LE BILINGUISME PRECOCE PAR "IMMERSION".**

Depuis douze ans DIWAN a ajouté son savoir-faire à la méthode de "l'immersion précoce" déjà bien connue, et développée notamment depuis vingt-cinq ans au Canada avec des centaines de milliers de jeunes canadiens anglais devenus bilingues anglais-français. L'enfant apprend ou perfectionne très vite le breton de façon naturelle en maternelle, et son acquis en lecture et écriture est transposé sans effort à la langue française qui est introduite progressivement en primaire. Les deux langues sont à la fois enseignées en tant que telles, et sont utilisées pour l'enseignement des autres matières des programmes officiels. Les élèves DIWAN, acquièrent ainsi sans effort particulier un bilinguisme "équilibré" où une langue n'est pas dévalorisée par rapport à l'autre. Ils sont d'ailleurs très attachés à leurs écoles et témoignent de la valeur de ce système par leur réussite scolaire.




## **LA PEDAGOGIE DIWAN**

En plus du principe de l'immersion précoce, les Ecoles DIWAN s'inspirent des méthodes pédagogiques les mieux éprouvées. La maternelle est un milieu très protégé qui stimule au maximum l'extraordinaire réceptivité naturelle des enfants jusqu'à 6 ans. Les effectifs sont limités, l'élève DIWAN est responsabilisé dans son travail et ouvert au monde extérieur. L'acquisition de bases très solides en lecture et écriture, en breton comme en français, est une des exigences fondamentales de la pédagogie de DIWAN. Des outils audio-visuels et informatiques développés par des enseignants de DIWAN sont introduits avec succès.



## **ENSEIGNANTS FORMES ET MOTIVES**

DIWAN est exigeant sur les aptitudes et la motivation de ses enseignants. De plus, leur formation est assurée par DIWAN, mais aussi par l'Education Nationale en vertu des accords passés. Il y a un échange continual d'informations et de résultats entre enseignants de DIWAN et avec des écoles similaires dans d'autres pays européens.



## **ECOLE GRATUITE ET OUVERTE A TOUS**

L'indépendance de DIWAN est totale et ses écoles sont ouvertes à tous les enfants, de familles bretonnantes ou non bretonnantes, en dehors de toute considération d'opinion ou de religion, et bien entendu, quelles que soient les ressources de ces familles, puisque la gratuité est un autre principe de base de l'éducation DIWAN.



## **PREMIER COLLEGE PLURILINGUE A BREST**

L'ouverture en Octobre 1988 du Collège "Roparz Hemon" à Brest a constitué une étape logique et fondamentale dans l'évolution de DIWAN. Cette ouverture a été longuement et minutieusement préparée par cinquante professeurs et linguistes qui ont adapté les programmes à un enseignement trilingue, puisqu'en plus du breton et du français, l'anglais dans un premier temps (et ensuite d'autres langues) devient aussi progressivement, grâce à la méthode immersive, une langue véhiculaire d'enseignement. Le fonctionnement du Collège est déjà un plein succès et ses effectifs augmenteront rapidement dans les prochaines années. Par la suite, l'ouverture d'autres Collèges dans d'autres localités de Bretagne sera évidemment nécessaire.

## DIWAN C'EST AUSSI...



... "AN HERE", une Maison d'Édition qui publie des livres et B.D. en breton, les revues CHOLORI et TALABAO, et qui prépare le premier grand dictionnaire monolingue breton qui sera particulièrement utile aux collégiens Diwan.



... "AN OALED", Centre Culturel et de Loisirs de Tréglonou qui permet toute l'année de s'initier à la culture et à la langue bretonne, en famille ou en groupe tout en pratiquant le cas échéant l'équitation, la voile, etc.



... "STUMDI", Organisme de formation permanente qui propose dans toute la Bretagne, aux professionnels et cadres d'entreprise des stages de culture et de langue bretonne, d'histoire, d'économie et de gestion, vidéo, techniques théâtrales, etc.

## AUDIENCE ET INFLUENCE DE DIWAN


Rares sont désormais les bretons, en Bretagne même tout au moins, qui n'ont pas encore entendu parler de DIWAN, d'une manière ou d'une autre. La presse régionale, les radios et télévisions régionales se font très souvent l'écho des événements de la vie des "Skolioù Diwan". DIWAN est désormais mis par les médias sur le même plan que les autres systèmes éducatifs. Mais son originalité et son identification à ce qu'il y a de plus significatif dans la culture régionale fait néanmoins percevoir DIWAN un peu comme une institution-pilote pour l'avenir de la personnalité bretonne. Et il est vrai que pour la première fois, le problème de la langue bretonne est abordé d'une manière à la fois concrète et en plein accord avec les exigences de la modernité. Les parlementaires bretons et les autres élus locaux de toute couleur politique, ainsi que le Conseil Régional de Bretagne et les Conseils Généraux, l'ont bien compris et ont manifesté à plusieurs reprises leur soutien unanime.

## FINANCEMENT DE DIWAN

Le budget global de DIWAN pour 1989 est proche de 10.000.000 de francs. Le coût moyen de la scolarité par enfant est tout à fait comparable à celui de l'Enseignement Public. Le financement de ce budget est assuré pour un tiers par l'Etat, pour un autre tiers, par la Région Bretagne et les cinq départements bretons, et le tiers restant doit être couvert par l'autofinancement et par les contributions volontaires individuelles, notamment sous la forme de virements automatiques mensuels.

## LE BILINGUISME EN EUROPE

La majorité de la population mondiale est bilingue, voire trilingue. Des dizaines de millions d'Européens parlent à la fois la langue de leur Etat et leur langue propre, ainsi que bien souvent une langue internationale, et ils tirent de ce plurilinguisme un avantage certain. Comme le gallois, le catalan, le frison, le frioulain, le galicien, etc., le breton est donc non seulement un patrimoine culturel précieux, mais c'est aussi un capital à faire fructifier par l'éducation bilangue précoce, qui seule, en dehors de la transmission directe par les parents, permet le renouvellement des générations bilingues.



## DIWAN CONCERNE CHAQUE BRETON

Comment peut-on être breton ? questionnait l'écrivain Morvan LEBESQUE en guise de titre à un de ses ouvrages. Il y a certes bien des réponses à cette question, mais celle qui s'impose le plus - notamment, et cela est révélateur, à ceux qui ne sont pas bretons ou d'origine bretonne - est "En défendant la langue bretonne"... Or parmi beaucoup d'autres initiatives louables et souvent admirables, DIWAN est sans conteste celle qui peut aller le plus loin dans ce sens, tout en contribuant de façon très positive au développement économique et social de la Bretagne. En effet, l'extension du système d'éducation DIWAN formera une génération plurilingue, ouverte et dynamique, fière de sa culture et apte à affronter le monde futur. C'est donc un devoir prioritaire pour tout breton de soutenir DIWAN, en se tenant informé de ses activités, en faisant connaître ses réalisations, en l'aider matériellement, surtout. C'est grâce à des milliers de personnes qui ont effectué des virements bancaires automatiques mensuels à DIWAN depuis douze ans que la situation favorable actuelle a pu être obtenue. MAIS CES MILLIERS DOIVENT DEVENIR DES DIZAINES DE MILLIERS. En effet, la croissance de DIWAN est une nécessité absolue pour le succès définitif de l'entreprise, et malgré les victoires remportées en 1988 et la reconnaissance officielle acquise, le relais du financement de DIWAN, en tant que véritable service public d'éducation n'est pas encore assuré par la Collectivité au même degré que dans des cas similaires dans d'autres pays Européens. Pour pouvoir continuer à progresser constamment en attendant une harmonisation européenne souhaitable et sans doute probable, DIWAN doit pouvoir compter directement sur la population bretonne, ou d'origine bretonne en dehors de Bretagne.

## VERSEMENTS A DIWAN ET IMPOTS

**Particuliers:** les versements à DIWAN comme à d'autres organismes d'intérêt général, notamment à caractère éducatif, sont déductibles de vos revenus déclarés et se traduisent donc par une économie d'impôts. Cette déduction est possible jusqu'à un montant total de vos dons n'excédant pas 1,25 % de votre revenu imposable. L'économie d'impôt dépend du niveau de votre revenu, c'est à dire du taux d'imposition s'appliquant aux tranches supérieures de ce revenu. Toutefois un régime particulier concerne la première tranche annuelle régulière de dons de 1.200,- F., avec une économie d'impôts de 56,8 %, soit 681,60 F., quel que soit votre revenu imposable.

**Entreprises:** les versements à DIWAN sont déductibles du bénéfice imposable dans la limite de 2% du chiffre d'affaires.

## AUTRES MOYENS D'AIDER DIWAN

DIWAN insiste évidemment tout spécialement sur les virements automatiques mensuels, qui ont été jusqu'à présent et resteront encore longtemps la clef de son développement, par leur importance globale et leur régularité. Mais les bretons et sympathisants qui ont bien compris de quel enjeu vital il s'agit et qui en ont la possibilité aimeront certainement apporter d'autres contributions à l'avenir de l'entreprise. Que l'on sache qu'il est déjà extrêmement important d'aider à titre individuel à la plus large diffusion des informations sur le système éducatif et sur les réalisations de DIWAN. Pour beaucoup de personnes mal informées, le problème de la langue bretonne est en effet perçu d'une manière peu positive, dans la seule optique d'un passé révolu, et sans aucune connaissance des cas similaires en Europe. Vous aiderez également DIWAN en lui faisant connaître les noms et adresses de personnes, organismes ou entreprises susceptibles d'être intéressées et d'apporter aussi leur concours. Par ailleurs, des comités de soutien constitués en associations locales Loi de 1901 jouent un rôle très utile aussi bien en Bretagne que partout ailleurs où des bretons ont émigré. Ces comités organisent des fêtes, des conférences, multiplient les contacts augmentant la notoriété et les ressources de DIWAN.

Pour plus de renseignements n'hésitez pas à écrire ou téléphoner aux responsables de DIWAN à Tréglonou.

DIWAN  
Treglonou B.P. 22  
29214 LANNILIS  
Tél. 98 04 05 42